

KANTIK

AROK ANN TAOLENNOU.

1

Sellit piz ouz ann taolennou
 Zo mellezour an eneoù
 Hag a lavar da bephini }
 Ar virionez, eb damanti. } *bis.*

2

Daou hent a zo, daou hent ebken
 Emaint digor dirak pep den :
 Hent ann ifern hag hent an Ee,
 Hent ar maro, hent ar vue.

3

Hent an ifern frank ha ledan
 Dre ar pec'het a gas d'ann tan,
 Darempredet eo bet atao
 Gant kalz a dud, siouas dezho.

4

Ourgouil, coler, luxur, avi,
 Avarisdet ha diegi,
 Gant ar vesventi milliget
 A ra eleiz a dud daonet.

Breman eo deoc'h teurel evez,
Lakaat urs-vad en ho puez :
Koll hoc'h ene eo koll peb tra...
Re zivezat e ve lenva.

6

A greis kalon hag eb gortoz
Kemerit hent ar barados ;
Kimmiadit krenn diouz ar pec'het
Ha baleit eb nec'h ebet.

7

Rag ganeoc'h e vezo Jesus,
Ha ganthan e viot eurus,
Euruz er bed, dre ners he c'hras
Hag enn envou eurusoc'h c'hoas.

Imprimatur :

Corisop, die 5 Maii 1874.

JÉGOU, Vic. gen.